


SANT JAOUA BENNIGET,
 HOR SELAOUIT BEPRED,
 MIRIT EN HAN' DOUE,
 HOR C'HORF HAG HON ENE



- 1
 En hor bro, peb kristen
 A lavar hoc'h hano ;
 Dreist - oll e Plouvien,
 C'hwi 'zo meulet atao.
- 2
 Ha penaoz ne vec'h ket ?
 Plijet eo gant Doue
 E ve bet digaset
 Ho korf deom da leve
- 3
 Enor ha meuleudi
 D'ho relegou santel !
 Kaer e vo deom pedi
 'Vid goulenn ho skoazell
- 4
 Ho pennoz, ni ho ped
 Warnom e peb mare !
 Ha roit deom pa vo red,
 Heol tomm, pe gliz an nenv
- 5
 Tud a zo deut aman
 D'ho kaoud , sec'h an amzer,
 Hag o - deus bet gant joa
 Glao puill d'ho farkeier
- 6
 'Vel an douar kalet
 Sec'h - korn eo an ene
 Hag e rank kaout bepred
 Gras ha bennoz Doue.
- 7
 Hirio, warhoaz, atao,
 Bezit ouz hon diwall,
 Difennit mat ho pro
 Ouz kounnar an dud fall.
- 8
 D'hor bugale, kreskit
 Ar gened, ar furnez,
 D'ar yaouankiz mirit
 Lilienn an elez.
- 9
 Grit deom 'pad hor buhez
 Beza gwir gristenien,
 Ha gand ho madelez
 Gounit hor hurunenn.
- 10
 Dreist - hor ni a hortoz
 Buhez hir, vertuzuz,
 Grit m'ho do ar re gozh
 Ganeoc'h maro eurus.
- 11
 Ni n'hon - eus c'hoant breman
 Nemet, goude mervel,
 Mond gameoc'h da danvad
 Eurusted beurbadel.

